



ASEM (Dinan)

Kinnig labour embannet d'an / ar jeudi 05 septembre 2024

Lec'h : **Dinan**

Doare post **CDD** H/F

Padelezh

diouzhtu

Deskrivadur ar post-labour

Skol Diwan Dinan 'ginnig ur post labour ASEM en ur c'hlasad gant ar re vihan hag ar re grenn (16 skoliad) + skoazell war ar gantinenn hag ar c'hempenn

Eus 7e30 da 5e45 g.m.

Al Lun, Meurzh, Yaou ha Gwener

+ 2 devezh dre brantad vakañsoù skol

Ho kefridi 'vo :

Kempenn al lec'h adalek 7e30

Bezañ er c'hlasad gant skolaer.ez ar re vihan (PS) hag ar re grenn (MS) evit sikour war an obererezhioù adalek 8e40

Servij kantinenn rannet : skoazell evit ar predoù, evit skaotañ al listri hag evit kempenn al lec'h-gantinenn

Merenn-vihan ar vugale 'chom en diwallerezh

Kempenn al lec'h

GIEK dre eur - darn amzer bloaziekaet

Ar post labour-mañ zo digor d'an dud an TGM Bugaligoù pe Bak SAPAT gante.

Trugarez deoc'h da gas deomp ho CV : aep@diwan-dinan.com

Skiant-prenet ha barregezhioù goulennet

Barregezhioù ret :

Gouizieki war psikologiezh ar vugaligoù

Mestroniañ reolennoù yec'hederezh an ti hag ar boued

Brezhoneg komzet deuet mat

Doare den ret :

Bezañ gouest em azasaat ha rakprientiñ

Doujañ d'an eurioù

Bezañ madelezes ouzh ar vugale vihan

Kengred ha doujañs evit e genlabourerien

Liesvarregezh ha pasianted

Sellout ouzh ar c'hinnig : <https://www.diwan.bzh/br/offres-emplois/asem-dinan-080920242224>